

Ar bleiz hag an daou ejenn

Daou ejenn a oa o peuri 'barz eur lanneg,
Pa zegouezas eno eur pikol bleiz kezeg¹,
A deuas etrezeg deze 'n eur yudal gand an naon ;
Med an daou ejenn-mañ, 'vid-se, n'o-deus ket aon ;
'N em lakaad a reont prim kostez-ouz-kostez,
'Vid bezañ prest da zegemer komper Gwillaou
War veg lemm o herniaou².

Hemañ, a damm da damm, a dosta dioute,
A dro hag a zistro, lamp a-zehou, a gle'
Med kaoud 'ra bepred an eil pe egile.
Prest d'hen kas 'trezeg ar bed all
Heb chomel pell da zidortal.
Erfin, mezeg, divi, hanetr-lahet,
E rank moned en-dro pe bezañ dizahet ;
Ha kleved a ra 'neze o tond war e zeuliou
En eur loskad blejadennou.

Daou pe dri deiz goude e teuas adarre
Da êsaad o zapoud ha siwaz ! 'benn neuze
'Oa savet kasoni entre an daou ejenn ;
N'hallent mui 'n em houzañv, n'houlent mui 'n em zouten
Hag evel-se 'hallas doned dioute a-benn
En eur dagañ aneze 'n eil goude egile.

Bretoned, ma breudeur, diwallit n'errufe
Ar memez tra ganeoh en amzer da zoned.
Chomit oll unanet, 'n em unanit bepred
Nan eus³ 'med dre eno a hallfet adsevel
Ar brezoneg hag ho pro garet Breiz-Izel.

¹ eur pikol bleiz kezeg : eur pikol bleiz.

² o herniaou : o herniou.

³ Nan eus : n'eus (tregerieg).